

Fañch Elies (Abeozen): Hervalina Geraouell (1943)
Auszug (nach Gibson & Griffiths 2006)

Fromet e oa Hervalina, pa save, da-heul an daou baotr, gant an diri, betek burev *Breizh da Viken*. Ur skritellig oa war an nor. Skeiñ a rejont hag e voe diouzhtu digoret dezho. An den yaouank, o doa gwelet e sal ar c'heltieg, oa dirazo. Un dra bennak a laouen oa en e zaoulagad bev hag un doare mousc'hoarzh a c'hournije war e c'henoù start.

«Moarvat eo laouen o welout unan bennak, n'en deus ket gwelet betek-henn, o tont war e dro,» a soñje Hervalina oc'h azezañ war ar gador kinniget dezhi. «Ne dle gwelout atav nemet an hevelep pennoù.»

Job a anavezze dija Denouel, merour ar gelaouenn. Goude ur gerig diwar-benn piv oant ha war be studi e labourerent e troas an diviz war dachenn ar brezhoneg.

«Ur chañs vras hoc'h eus,» eme Zenouel da Anton hag Hervalina, «da vezañ brezhonegerien. Ni, amañ, Breizhuheliz, a glask addeskiñ yezh hor bro. Ne deo ket aes avat, n'eus kreizenn vrezhonek ebet e Roazhon ha ne deo ar skol-veur nemet un ti gall da zeskiñ kelennerien evit ar skolioù gall. Ha n'en deus ket ar brezhoneg e-barzh kement a dalvoudegezh zoken hag ar portugaleg a vez kelennet en hevelep sal. Perak e kav deoc'h ne deu ket ar studierien muioc'h war-dro kentelioù Per ar Gall?»

«Labour a-walc'h o deus gant o studioù a-hend-all», eme Job an Dred. «Ar brezhoneg ne gas da neblec'h. Pa vez echu o labour, an darn vuiañ eus ar studierien a glask en em ziduiñ ha ret eo karout ar brezhoneg evit mont war-dro sal ar c'heltieg.»

«Ma ne vije nemet ar re a gar al latin, ar gresianeg, ar saozneg pe ar galleg zoken,» a droc'has neuze Hervalina, «o vont war-dro ar skol-veur, ne vefe ket re sammet ar gelennerien gant o labour.»

«Koulskoude,» eme Zenouel, «an notered, ar vedisined hag all, mar deuont da Vreizh Izel, o devo ezhomm da vont e brezhoneg ouzh an dud.»

«Ne deo ket er skol-veur e teskint ar brezhoneg-se, mar o deus da zeskiñ,» eme Anton d'e dro. «Eno e vez disklêriet ur bajenn eus *Pipi Gonto* evel ur pennad eus Kikero pe Milton, ne vez ket desket penaos toullañ kaoz gant tud Koadout pe Garaez.»

«Ya, ret eo magañ karanzet-vro evit karout ar brezhoneg ha kemer plijadur en e studi. Seblantout a ra din,» eme Zenouel, «ez a war an dachenn-se ar maout ganz Breizhuheliz. Ar vrezhonegerien a chom morgouseketoc'h. Ne gomprenomp ket perak.»

«Me 'gav din», eme Hervalina, «e kredont ez eo a-walc'h komz brezhoneg evit bezañ Bretoned, ha pa ne ve en o fenn nemet mennozhioù a vro estren. Pa ra an aotrou Turkantin ur brezegenn e brezhoneg, da goulz ar votadegoù, e vez kavet tud da grediñ ez eo dre m'eo ur Breton mat. An aotrou Turkantin ne soñj nemet e mouezhioù e genvroiz hag e politikerezh Pariz. Ne ra forzh eus Nevenoe na Pontkalle, ne deu war e vuzelloù nemet anvioù Janed Ark, ar marichal Foch, Dixmude, Verdun hag all. An aotrou Turkantin hag all ne dint ket enebourien da Vreizh ha d'ar brezhoneg, nann, nemet e servijo kement tra er vro-mañ da vrasañ gloar Frañs. An aotrou Turkantin zo skouer tud ar blasenn e kement kêrig a Vreizh Izel. Anaout a reont choazh ar brezhoneg, e gomz a reont ouzh an dud vunut. Ar galleg, avat, zo, pell zo, yezh o empenn hag o c'halon. Ar vrezhonegerien rik n'o deus nag an amzer nag an deskadurezh ret da garout ur yezh. Mont a reont da heul tud ar blasenn hag o brasañ c'hoant eo e teufe o bugale da vezañ par da re tud ar blasenn.»

Denouel a selle gant un tamm eston ouzh ar plac'h yaouank. Hervalina, eus he zu, ur wech chomet a-sav, a soñje: «Petra c'hoari ganin? Setu me oc'h ober politikerezh a-greizh-holl, diwar-benn ar brezhoneg. Biskoazh kemend-all!»

«War a welan, eme Zenouel a-benn ur pennadig, «ne welit ket gwall vat stad ar brezhoneg en ho pro.»

«O!» eme Hervalina, «ne varvo ket c'hoazh diouzhtu. Un dra a c'hellomp gwelout, avat.»

Eus an tri studier omp amañ, n'eus nemet Anton Benneg a ve bet moarvat dija ar galleg yezh e gavell, daoust m'en deus desket brezhoneg a-vihanig gant mitizhien e vamm ha moused ar skol. Mat, Job an Dred ha me ne domp ket hon-daou ken beuzet e-barzh ar brezhoneg ha m'eo bet hor c'herent en hor raok. Ar brezhoneg en deus kollet tachenn ennomp hag a gollo c'hoazh mar rankomp mont da vevañ er-maez eus Breiz Izel. Ma ne gemm ket stad an traoù e teuio un deiz bennak ar brezhoneg e penn e hent.»

«Ret eo dihuniñ ar garantez-vro e kalon ar Vretoned,» eme Job an Dred, « ha ne deo ket aes; ar skolioù, an Iliz ne reont nemet ar c'hontrol, zoken en iliz ha zoken e brezhoneg. Daoust ha Breizh a c'hell bezañ evit an darn vuiañ eus ar veleien estreget bugel devotañ merc'h henañ an iliz?»

«Da c'houzout eo ha niverus e teuy da vezañ, deiz pe zeiz, ar Vretoned dihunet,» a glozas Denouel. «Grit abostolerezh en-dro deoc'h. Studiit ar brezhoneg ha savit pennadoù evidomp mar doc'h dornet evit ober se. Studiit hon istor peogwir eno eo emañ diazez ar garantez-vro.»

Savet eo Havelina hag e daou geneil da vont kuit. Ur sell a daolas war ar gambrig. Kartennoù-post peget ouzh ar mogerioù. Un engravadur war goad: ur Breizhad o sevel ur maen-bez ma lenned warnañ *Amañ eo beziet Breizh*. Stardañ e zorn da verour *Breizh da Viken* a reas Havelina hag e soñje, tra ma tiskenne gant an diri. «Daoust ha dibenn un amzer zo bet eo a zo o kenderc'hel da vevañ-bevaik er gambrig-se, er gelaouennig a vez savet enni evit kant lenner bennak, skignet e-touez tri milion a dud, pe deroù un huñvre gaer a deuo, deiz pe zeiz, da wir? Piv 'oar?»

«Petra soñjit eus Denouel?» eme Job an Dred ouzh Havelina.

«Un den a feiz moarvat,» emezi. «N'on dare ha dont a raint, eñ hag e gamaraded, a-benn da zihuniñ o bro. Ar pezh a vije bet trist, avat, eo ne vije ket bet kavet unan bennak er vro-mañ da vagañ ur seurt huñvre.»